

Lettre d'information n°142 - Janvier 2026

Exposition "Observons les oiseaux" Du mardi 6 janvier au samedi 7 février



Avec cette exposition mêlant réalité augmentée, supports pédagogiques et panneaux explicatifs, devenez un ornithologue en herbe et découvrez les multiples relations qu'entretiennent hommes et oiseaux depuis des générations.

Vingt oiseaux communs en Europe ont été sélectionnés, remarquables par leur chant et leur comportement. Après avoir fait leur connaissance au cours de cette exposition, il vous sera plus facile de les reconnaître dans la nature !

Tout public - gratuit

Balade « À la découverte des chants d'oiseaux » Samedi 31 janvier à 14h30



Balade à la découverte des chants d'oiseaux de la ville de Guingamp.

Départ de la Médiathèque. Pensez à mettre des habits chauds !

Balade animée par le Centre de découverte du Son de Cavan

Tout public (à partir de 8 ans) - gratuit - durée : 2h

Sur inscription : 02 96 44 06 60

Bébés lecteurs : de 0 à 3 ans Mardi 27 janvier à 9h30 et 10h30



Deux séances : de 9h30 à 10h15 et de 10h30 à 11h15

Les bibliothécaires du secteur jeunesse initient les tout-petits au plaisir des histoires.

Pour les 0-3 ans - gratuit - durée : 45 min

Sur inscription auprès du Relais Petite Enfance 06.71.90.34.76

Heure du conte : un mercredi sur deux à 15h A partir de 4 ans

Dans le cadre de l'exposition « Les oiseaux » :

Mercredi 7 janvier

**Conte : « La petite poule rousse & rusé renard roux » /
Pierre Delye et Cécile Hudrissier**



Dans sa maison douillette, Petite Poule Rousse s'active. Les culottes à trous, elle les recoud, les habits à la mode, elle les raccommode, les chemises grises, elle les reprise. Seulement ce qu'elle ne sait pas, c'est que dehors, un danger la guette, un danger tout roux lui aussi. Mais pas question de se laisser manger sans rien faire ! La Petite Poule Rousse a plus d'un tour dans son sac...

Mercredi 21 janvier

Pause lecture : « Oiseaux et oiselles »

Histoires d'oiselles et d'oiseaux et autres jeux de plumes en musique !



Nuit de la lecture : vendredi 23 janvier à 20h Thème : « villes et campagnes »



Public :
adultes et adolescents

gratuit

Cette année la Médiathèque, le Théâtre du Champ-au-Roy, le collège Jacques Prévert et l'Inseac s'associent à l'occasion de la **Nuit de la lecture**, le **vendredi 23 janvier 2026 en soirée** pour proposer des lectures à voix hautes, portées par des comédiens professionnels, des étudiants et des lecteurs de la médiathèque.

1) Vous souhaitez participer en tant que lecteur ou lectrice ? Venir partager un texte de votre choix ?

Vous retrouverez un choix de textes sur le thème "villes et campagnes" à cette adresse :

<https://www.nuitsdelalecture.fr/ressources/bibliographie-sur-le-theme-des-villes-et-campagnes>

Vous pouvez également proposer un texte de votre choix sur ce thème.

Vous manquez d'inspiration ? Nous sommes là pour vous aider ! Et en option, des ateliers de lecture à voix haute vous seront également proposés samedi 10 et samedi 17 janvier 2026 de 10h à 12h.

2) Vous pouvez également vous inscrire pour assister simplement à la soirée. Rdv au collège Jacques Prévert de Guingamp à 19h45.

Dans les deux cas, inscrivez-vous auprès de la médiathèque par courriel (mediatheque@ville-guingamp.com) ou par téléphone (02 96 44 06 60) ou directement à la médiathèque.



Médiathèque de Guingamp
1, Place du Champ-au-Roy
22205 GUINGAMP Cedex
02 96 44 06 60
mediatheque@ville-guingamp.com
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>

Lizher-kelaouiñ niv.142 - Miz Genver 2026

Diskouezadeg "Sellomp ouzh an evned" Eus ar Meurzh 6 a viz Genver d'ar Sadorn 7 a viz C'hwevrer



Savet eo bet an diskouezadeg-mañ gant gwirvoud kresket, binvioù pedagogel ha panelloù displegañ abalamour da lakaat ac'hanoc'h da vont da danvez evnoniour ha da c'houzout hiroc'h war al liammoù a bep seurt a vez skoulmet pell-pell zo etre an dud hag an evned.

Ugent spesad evned hag a gaver stank en Europa zo bet dibabet, bep a vod dezhe o-unan da ganañ ha da vevañ. Aesoc'h e vo deoc'h anavezout anezhe en natur ur wech m'ho po gouvezet hiroc'h diwar o fenn e-barzh an diskouezadeg-mañ !

Evit an holl - digoust

Baleadenn « Ober anaoudegezh gant kan an evned » Sadorn 31 a viz Genver 2026 da 2e30



Mont da vale evit ober anaoudegezh gant kan an evned e Gwengamp.

Loc'het e vo eus ar Vediaoueg. Dav e vo gwiskañ dilhad tomm !

Kaset e vo ar valeadenn gant Kreizenn ar Son e Kawan

Evit an holl (adalek 8 vloaz) - digoust - padout a ray 2e

Ret eo lakaat hoc'h anv en a-raok : 02 96 44 06 60

Babigoù lennerien : eus 0 da 3 bloaz Meurzh 27 a viz Genver da 9e30 ha da 10e30



Div abadenn : eus 9e30 da 10e15 hag eus 10e30 da 11e15

Al levraoueger-ien-ezed e rann ar yaounakiz a laka ar re vihanañ d'ober anaoudegezh gant an istorioù hag ar blijadur a vez da-heul.

Evit ar vugale 0-3 bloaz - digoust - padout a ray 45 munut

Ret eo lakaat hoc'h anv en a-raok en Erlec'h Bugaligoù
06.71.90.34.76

« Ur wech e oa... » : bep eil Merc'her da 3e goude merenn Adalek 4 bloaz

Da-geñver an diskouezadeg « An enved » :

Merc'her 7 a viz Genver


Kontadenn : « Yarig Ruz & al louarn rous fin » gant Pierre Delye ha Cécile Hudrissier



En he zi klet emañ Yarig Ruz o reiñ nerzh. Brageier toull da vezañ didoullet, pezhioù dilhad diouzh ar c'hiz da vezañ dreset, rochedoù livet da vezañ freselet. Ne oar ket zo eus un dañjer er-maez avat, un dañjer o c'hedal, un dañjer ruz evelti. N'emañ ket e soñj da vezañ debret hep en em zifenn e mod ebet avat ! Yarig Ruz a oar penaos c'hoari un dro dezhañ...

Merc'her 21 a viz Genver

Ehan lenn : « Evned hag evnezed »



Istorioù evnezed hag evned, ha c'hoarioù pluñv all gant sonerezh !

Nozvezh al lenn : Gwener 23 a viz Genver da 8e noz Tem : « ar c'hêrioù hag ar maezioù »



Ar bloaz-mañ en em laka ar Vediaoueg, C'hoariva Maez ar Roue, ar skolaj Jacques Prévert hag EBUDAS asambles evit **Nozvezh al lenn**, d'ar **Gwener 23 a viz Genver 2026 diouzh noz** abalamour da ginnig lennadennoù a vouezh uhel, gant komedianed a vicher, studieren ha lennerien eus ar vediaoueg.

- 1) Faotañ a ra deoc'h kemer perzh evit bezañ lenner pe lennerez ?** Ha dont da reiñ da glevet un destenn hag a blij deoc'h ?

Er chomlec'h-mañ e kavfet un dibab testennoù war an tem « ar c'hêrioù hag ar maezioù » :

<https://www.nuitsdelalecture.fr/ressources/bibliographie-sur-le-theme-des-ville-et-campagnes>

Evit an dud deuet hag ar grennarded


digoust

Gallout a rit dibab un destenn all war an tem-mañ ha kinnig anezhi ivez.

N'oc'h ket awenet ? Prest omp da sikour ac'hanoc'h ! Hag ouzhpenn-se e vo kinniget atalieroù evit deskiñ lenn a vouezh uhel d'ar Sadorn, d'an 10 ha d'ar 17 a viz Genver 2026, eus 10e da 12e.

- 2) Gallout a rit lakaat hoc'h anv evit selaou an nozvezh hepken ivez.** Emgav er skolaj Jacques Prévert e Gwengamp da 7e45.

Ne vern ar pezh a vo choazet ganeoc'h e vo dav lakaat hoc'h anv en a-raok er vediaoueg dre bostel (mediatheque@ville-guingamp.com) pe dre bellgomz (02 96 44 06 60) pe er vediaoueg war-eeun.



Mediaoueg Gwengamp
1, Plasenn Maez ar Roue
22200 GWENGAMP Cedex
02 96 44 06 60
mediatheque@ville-guingamp.com
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>